

Gant al lennerien

SOÑJ SKOLAJIDI SANT-MARTIN-WAR-AR-MAEZ DIWAR-BENN AR FILM NOZ

D'ar Meurzh 5 a viz Here 2021 o deus diskennet skolajidi 5^{vet}, 4^{re} ha 3^{de} Tanguy Prigent traoniennoù Montroulez betek salioù nevez ar SEW (Salamandre-Entresort-Wart). Souezhet int bet holl gant an doare ma 'z eo bet savet ar salioù e-stumm korf ur vag troet en tu kontrol. Eno o deus sellet ouzh ar film bet savet gant Soazig Danielou anvet Noz. Gant skolajidi Kastell-Paol ha Lanneur e oant. Sed aze petra o deus soñjet reoù St-Martin diwar-benn ar film-se :

Romane de Blasio (5^{vet}) : "Me zo bet plijet kalz gant ar film peogwir, evit ur wech, n'eo ket un dresadenn-vev hon eus gwelet. Dre ma oa tost deus al lec'h emañ o chom e anavezhen lec'hioù zo (savet eo bet ar film e Brest dreist-holl). Ouzhpenn a-wechoù e oa traoù zo en galleg. Ur film ekstra eo neuze !!!"

Kaoura Drévilion (5^{vet}) : "E fin ar film hon eus kejet gant Yann-Edern (aktour Kevin), Clarisse Lavanant (aktourez Liza) ha Soazig Danielou ar film-aouzerezh. Soazig Danielou he deus lavaret ez eus bet ezhomm eus pemp bloaz evit sevel ar film. Lavaret he deus ma ne vije ket bet e brezhoneg n'he dije ket graet. Evit Clarisse Lavanant, e oa ar film kentañ, met Yann-Edern en doa graet filmoù a-raok. Evit an tri den-se eo ar brezhoneg un dra vat ha pouezus. Evidon e oa mat-tre ar film. Plijet on bet gant al lec'hioù. Mat eo oa ivez peogwir e oa galleg ha brezhoneg er memes film. Ar pezh n'en 'eus ket plijet din kement-se eo e oan kollet a-wechoù."

Ewen Audran (5^{vet}) : "Mat-kenañ eo ar film ha dreist-ordinal an istor. Sed aze un diverradenn : Ur c'hrennard a glask penaos eo marvet e eontr. Tec'hout a ra. Mont a ra da welet Kevin, mignon kozh e vamm. Gantañ e kompren petra zo erruet d'e eontr. E vamm ivez a glask respontoù digant Kevin ha dont a ra en-dro en he spered afer an Erika, stag ouzh marv he breur. E-kreiz an afer : un darzhadeg en ur greizenn eoul-maen..."

Nino Leroux (5^{vet}) : "Plijet on bet gant ar film peogwir e oa bern a aksionoù. Me a gav din eo mat ar film. Savet mat eo hag ur bern sonjoù brav a zo bet kavet evit ar senennoù. Me zo bet plijet gant ar fed da welet daou aktour e fin ar film."

Enora Desmousseaux (5^{vet}) : "Me zo bet plijet gant ar film peogwir eo barrek aktourien. Trist eo ar film ha komzet e vez deus al lanv du."

Violette Crispils (4^{re}) : "Ar film zo bet un digarez evidon da lakaat an amzer da dremen. N'on ket bet gwall blijet gantañ peogwir ne oa ket kalz a suspens. Enoeus e oa un tammig neuze, met aozet mat e oa memestra. Ne oa ket fall-fall, met ne oa ket ar film gwellañ 'm eus bet tro da welet."

Axel Deniel (4^{re}) : "Mat e oa istor ar film. Met galleg ha brezhoneg a oa. Diaes oa neuze da gompren, a-wechoù. Mat eo ar film-se da welet peogwir e vez komprenet mat, memestra, hag istitlet e oa."

Eliaz Plouzen (4^{re}) : "Plijet on bet gant atersadenn an aktourien, ar salioù sinema ha gant senennoù ar film."

Cassandra Gestin (4^{re}) : "Savet hon eus goulennoù ouzh Soazig Danielou. Desket hon eus penaos he deus desket brezhoneg : *"Kroget em eus da gomz brezhoneg pell zo, met a-raok, d'ar poent ma 'm eus desket, ne veze ket desket evel bremañ. A-raok e veze graet stajoù en atantoù. Ma me vije ket bet deus ar brezhoneg n'emije ket graet ar filmoù 'm eus graet"*. Evidon e oa mat-tre ar film, me 'm eus bet kalz a blijadur da welet ar film-se. Kinnig a ran deoc'h mont da welet anezhañ. Ouzhpenn da-se n'eo ket diaes da gompren dre ma 'z eo istitlet e brezhoneg."

Pauline Bibaud (4^{re}) : "Desket 'm eus e oa Klaris Lavanant ur ganerez hag abalamour da-se e vez klevet anezhi o kanañ e-barzh ar film. Me 'm eus desket ivez ez eus bet ezhomm deus 5 bloaz evit ober ar film, peadra oa d'ober : filmañ, ijinañ ha traoù all. Plijet on bet gant ar film peogwir e oa mat. Plijet on bet gant an aktourien peogwir e oa speredek an tudennoù, ha fin. Met n'on ket bet plijet gant ar senenn 'lec'h m'emañ an dudenn Liza (Klaris Lavanant) o kanañ. Direnkus e oa, ar baotred diraki n'o deus ket goulennet diganti kanañ. Padal he deus kroget d'en ober, memestra. Mat e oa ar film dre vras, met n'em eus ket komprenet penn-kenañ ar film. Ne oa ket sklaer evidon afer ar repuidi hag ar boliserien."

Liza Le Bechenec (4^{re}) : "Sinopsis : Noz zo istor ur paotr 15 vloaz anvet Mael en deus

kudennoù er skolaj. Bevañ a ra gant e vamm, e vreur hag e dad. Un deiz e teu ur paotr iskis anvet Kevin er skolaj evit komz eus an dram. Egile a anavez e vamm, Liza ! Mael en deus bet klevet atav e oa bet lazhet Lomig, breur gevell e vamm, abalamour d'ur gwallzarvoud moto met daoust hag-eñ n'eo ket Kevin eo en deus lazhet anezhañ ? Va soñj : Un istor savet mat eo, liammet gant istor an Erika hag a gont reveulzi un nebeud Bretoned goude an darvoud spontus-se. Plijet on bet gant ar film, un film a-galite eo ha mat eo e vije bet e brezhoneg hag e galleg. Brav-kenañ eo ar skudennoù filmet gant ar c'hamera ! An aktourien a c'hoari mat, dre vras, met bez' ez eus lodennoù eus an istor eo diaes krediñ enno..."

Matty Rainero (3^{de}) : "Me 'm eus kavet mat ar film peogwir eo, da gentañ tout, ur film e brezhoneg. Plijus 'oa an istor ha kavet 'm eus mat ar penn kentañ gant ar repuidi, met da c'houde ne vez ket komzet kalz deus ar repuidi. An aksionoù ne oant ket mat-tre evel e penn-kentañ etre ar polis hag ar repuidi. Evit echuiñ 'm eus kavet mat e vez komzet deus istor Breizh evel peñse an Erika ha dreist ar fed da sellout ha da gomz gant an aktourien ar film."

Gwenvel Floch' (3^{de}) : "Sujed pennañ an istor a zo ur sekred familh a ra evel un darzhadenn e-barzh pennoù an tudennoù pennañ. Skeudennoù teñval 'zo hag ur muzik a zo liammet-mat ouzh ar skeudennoù. Paliou zo a-drek istor ar film. Komz a ra deus gwirioù ar repuidi, ar grennarded hag o c'hoant da stourm, sekredoù familh, istor Breizh (komzet 'vez deus an Erika). Gwelloc'h vije bet, d'am soñj, lakaat un tammig muioc'h a aksion. Dedennus eo ar film, memestra."

Anjelina Creac'h (3^{de}) : "Ma soñj war ar film a zo mat peogwir e plij kalz din ar filmoù thriller. Evit an holl dud a gav mat ar film thriller, gwirvoudel hag e brezhoneg : evidoc'h eo ar film !!!"

Raphaël Le Bihan (3^{de}) : "Er film e oa kanaouennoù, muzik. An dra-se a oa mat ha liammet e oa gant istor an Erika er senennoù trist. Kalz a santimansoù a oa er film. Klok ha mat e oa. Plijet on bet gant ar film peogwir e oa klok, gant flashoù-back. Gwirvoudel e oa an dud ha kalz a dudennnoù disheñvel a oa."

Loù Zannol (3^{de}) : "Dre ar film-se e vez lakaet kemennadennoù da vezañ klevet peogwir e tiskouez kudennoù a vez kavet er mare-mañ : ar repuidi, peñseoù bigi eoul-maen."

Savet eo bet e brezhoneg. Diskouez a ra e c'hall ar brezhoneg servij er vuhez. Kavet am eus e oa graet mat-tre ar film. Aes eo da gompren. A-wechoù e oa diaesoc'h met plijet on bet memestra. Plijet on bet peogwir e vez aksionoù mesk-ha-mesk gant kudennoù an amzer a-vremañ. Mat eo da vezañ gwelet."

Peio Morvan (3^{de}) : "Ar film-mañ zo bet savet evit lavaret eo ret bezañ jentil gant an holl dud ha kaout resped evito. Lavaret e vez eo lakaet tout an dud er memes live buhez. Kavet 'm eus e oa mat ar film-mañ peogwir e oa filmet mat. Farsus e oa peogwir ez eus ul lodenn deus ar film a zo bet troet en va skolaj, er Releg, er bloavezhoù 2018-2019."

Vlan Littière (3^{de}) : "Me 'm eus kavet e oa mat an istor peogwir e klask Mael penaos eo marvet Lomig. An aktourien a c'hoari mat roll an tudennoù."



Gant Drig

GWELLOC'H ESSAIS LEIZH AN OTOIOÙ
EGET ARC'HANT LEIZH AR GODELLOÙ



Evit selaou ar pennadoù e-lec'h ma vez gwelet an arouez-mañ.

Skanniñ ar "QR code" pe mont war-eeun war : www.ya-kazetenn.bzh

Ya I, Sizhunieg
Journal hebdomadaire N° 856
du Vendredi 6 novembre 2021
1,5 € an niverenn / le n°
80 € ar bloaz / l'année
N° CPPAP : 0522 C 86790
Embannet gant / édité par :
Keit Vimp Bev, 29520 LAZ
02 98 26 87 12
Renner embann / Dir. publication :
Y-F. Jacq, yf.kvb@orange.fr
Kenurzhier / Coordinateur :
Y-F. Jacq, yf.kvb@orange.fr

Maketenniñ / Mise en page :
N. Gourvenec, nikolaz.kvb@gmail.com
Kourmanantoù / Abonnements :
M. Gallais, keit-vimp-bev@wanadoo.fr

Moulet gant / Impression :
Le Télégramme
7 voie d'Accès au Port,
BP 67243
29672 Montroulez/Morlaix Cedex

Ar pennadoù sinet ne engouestlont nemet kiriegezh ar re o deus o skrivet.